



# CHANSON

## POTRET PLOUILLAU.

Var ton : *Adieu, Pontréo.*

**M'**AM bije speret da gompreñ, evel a meus  
fantazi,  
Me a vije n'em implijet da zonet da gomposi  
Eur c'himiat leun eus a c'hlac'hар, grêt da gons-  
crivet yaouanc

O deus tennet ar billet ebars er blaves prezant.  
Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemp  
a vis guengolo,

E zeo digueet adare eus a baros Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme, tud eus a re der-  
rupla ;

Glac'haret ê oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus qen nemet pêvar :  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar  
Meledar,

Ha Yannic Pateus ar Goajouha Pipi an Aveant;  
Pêvar den eus a re vrava, corfou caer ha tud  
vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad:  
Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad !

Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qèz  
desolet !

Va c'halonicebars em c'hreiz zodija qazi rannet.

Calz a sonchfe dê, marteze, penos e ven  
ur poltron,

Em be aon rac un ten fuzuil pe rac ur vouled  
canon,

P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an  
hentchou,

Pe gousqet var ur guele can ebars er c'hor-  
degardou.

Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha  
va zabren,

Bale bemde a guêr da guêr dre ar fabq hac ar  
vouullen ;

Hagoude e fin va beach rancout marteze campi,

Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bi-  
voaqi.

Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'halent  
lenn em c'halon

Evit guelet va bolonte ha va inclination ;

Ma na fotfe nemet va goad, me en scuillfe tout  
joaüs

Evit souten hon Impalaër, un tad qer caran-  
tezus !

Piou na gombatfe qet hardi gant un Impa-  
laër christen ?

Ur gaus qer just hac e hini a zo facil da zouten,

Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudardet  
an Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-  
Santel.  
Arça eta, camaradet, qent quittat eus hor  
c'hontre,  
Demp-ni da ilis Plouillau da suplia hon Doue  
D'or preservi demeus goal chanç pa vezimp en  
armeou,  
Il a da gonsoli bars er guêr hon tadou hac hor  
mamou,  
Adieu dêc'h, Autron Sant Millau, patron eus  
ar baros-mâ ;  
Adieu, qerent ha mignonet, cessit brêmâ da  
vouela :  
Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign  
ac'hanomp,  
Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout e  
lec'h ma zefomp.  
Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad  
dezolet ;  
Piou a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret :  
Ma vije va mab qèz er guêr, en dije va soulajet :  
Clêvit ar vam o qimiadi ive digant e buguel :  
Deus amâ c'hoas ma c'hambrassin ur vech qent  
eguet mervel ;  
Abenmaretni d'arguêr me vo êt eus ar bed-mâ

Deus amân etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet  
d'ar billet,

Bemnos vel ma fot din cousqet, me a seblant  
da velet

O tont eus eur gombat sanglant, var eur chariot  
blesses,

Pe tolet en eun hospital, gant an ollabandonet.

Ar soudard yaouanq constristet, c'hoas qent  
eguet partia,

Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela :

Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en  
esperanç :

Doue, tad a visericord, a zo bras e brovidanç.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gant graç Doue hac ar Verc'hes, e vezò fin d'ho  
clac'har ;

Evit merq eus hor vaillantis, gant lore deus hon  
tocou,

Ni a zistroye prest d'ar guêr evit sec'hi ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet,  
Adieu d'hon oll anaoudeuez, ha qerent, ha  
mignonet :

Ha ma na memp qet ar boneur er bed-mâ d'en  
em velet,

Graç deomp ebars er barados assambles d'en  
em gavet.

FIN.



## GUERZ

VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ

PARTIET GANT AR GUENTA RLQISITION.

Var ton : *Va Flaneden zo caled.*

TOSTAIT oll, tud yaouanq, ha gement true  
Ouz ar blanedan bonner a boez var va buo ;  
Deut da guemesq ho taelou assemblez gant va re,  
Da zoulagi va foanniou, deut da vœla varno.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet  
D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,  
Evit monet d'ar brezel da zouguen ab armo  
E faveur al liberte voa prometet d'am bro.

Abaoue qeit all amzer, n'alsen qet lavaret  
Pet combat ha pet poannion a meus me anduret.  
Tri c'hant leo am separe eus va c'herent nessa,  
Ha na meus bet diouto quêlou an distêra.

E creiz ar c'harnach bemde va buez exposet,  
Unan demeus va diou vrec'h erfin a meus collet,  
Hac evit oll recompanç e meus bet va c'honje,  
Hep recco nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilezel servich ar Republiq,  
N'en deo qet deut va speret da gompreñ er fatiq  
Eus an hent hir ha poannios am boa me da ober  
Aroc guelet va zud qèr hac éruout er guêr.

Collet e meus ar gallout da rëi sicour d'am zad,  
Hac o tivoeret va brec'h, n'allio mui labourat,  
Brêma va zud am mago, pas m'eus me c'hoas ar chanc  
M'o d'eus leve hac arc'hant ebars en abondanc.

Cetu me dija éru tostic demeus ar guêr;  
Gant ar joa ouz va güslet an oll a ray dîn cher.  
Va zad, va mam, va c'herent, breudeur ha c'hoarezet,  
Ha va mestrezic fidel, a vo oll ravisset.

Bonjour déch', ô va c'hontre! eurus en em gavân  
Gallout c'hoas ho contempli, dont da vervel amân.  
Va c'halon gant ar joa vrás em c'hreiz zo seziet  
O tostat demeus an ty el lec'h mon bet ganet.

Mes oc'h antreal enoi, e zòa bet trubuillet,  
Un den dianav dîn-me en deuz dîn lavaret :  
Eruet fall oc'h amân; sortiit va mignon ;  
Ne mâ qet ar mestr er guêr, n'ho po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini  
Touez quenliez personach a voa o rëa eu ty,  
E meus-me prest respondet : ententit va rëson,  
Me n'en don qet deut amâ da glasq an aluzon.

Clasq a rân va c'herent quer er plac m'òn bet ganet ;  
Al lec'h-mâ a zo dezo, amâ òa bet maguet.  
Lavarit dîn, me ho ped, pelêc'h en o c'havîn :  
Ne zelot netra que dîn evit va c'hontantin.

An den-mâ a zo follet, int commandet criail :  
N'en dê qet mab d'hor mestr-ni; ret eo er chasseal.  
Guëlet ho pijé neuze eur vandeo mevellienn  
O tiredec gant bizier dam chasseal souden.

O sortial gant glac'hat ha beuzet em daelou,  
Da glasq va zud elec'h all, pe clêvet ô c'hêlou,  
En heat e zòn bet scòet vel gant euo tol curun,  
Pa meus-me anaveet voa collet hor fortun.

Souden e meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa,  
Eur zac'hic staguet outi, o c'houlen e bara.  
O clasq compren ar maleur varnomp-ni diguëzet,  
Va speret zo bet troublet, ha va c'halon manret.

O Doue oll-buissant! roït dîn hoc'h asistanç,  
Roït dîn an nerz da glêvet penos ho Providanç

E deveus bet permetet, evit ma c'hastia,  
Ma zomp-ni bet reduiset er stad an horruplat

Va c'hoaric paour me ho ped, soulajit va mizer;  
Hast bras a meus da glêvet qêlou deus va zad quer,  
Hac eus ar vamic tener e deveus hor savet :  
Mervel a râa en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paoui! ne oufes qet compren  
Peguen bras eo hor maleûr, peguer bras hon angen...  
Allas! ouspen hor madou a renqomp divoeret :  
Hor c'heren carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,  
Hon tad voa chomet fidel d'an Ilis Catholiq,  
Rac-se gant an tyrantet e zeo bet condaonet  
Da bignat var ar chaffot vit beza dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet,  
Hac ive, prestic goude, siouasl int bet guerzet.  
Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo,  
Ilor mam a zo bet neuzo scèet gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, da barlant; cessit d'am dezoli,  
Re a meus var an douar a dourmant hac aoui,  
Er moment mac'h esperen commanç beva euros,  
En em gavân, va Douel tuyoc'h tuy maleurus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat,  
E deus, d'am recompaci, guillotinet va zad,  
Laqet va mam da vervel dre nerz an dizesper,  
Ha güerzet va oll vadou; n'em bo nemet mizer.

Diouz an tonrmanchou garo a stourm ous va speret,  
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed !  
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantimant,  
A zoulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Var zu ty va mestrezic e zàn gant esperanç  
Caout en e fidelite remed eus va zouffranç :  
Bonjour déc'h, va rouanez, cetu me deot er vro :  
Ancouët eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

Me zo Fanchic, ho mignon, distro eus ar brezel,  
Hac a zo en peb amzer chommet dêc'h-u fidel.  
Demeus va oll garante ebars en hoc'h andret  
E meus brêmâ esperanç beza recompance.

Petra, paour qèz reuzeudiel clasqit-u em c'hever?  
Biscoas ne meus ho güelet, na deziret ober ;  
Biscoas ne meus ho caret, na birviqen n'er grân,  
Ha cetu en bêr gomzou, ho setanç diveza.

Me zo an den maleurus, ne gafet qet e bar.  
Mil guech milliguet an heur m'on deut var an douar!  
Oll gouliou va c'halon zo névedigoret,  
O veza bet rebutes gant va maya caret.

Va mestrez ouz va güelet couezet en paourente,  
Nijet e fromessaou, nijet e c'harante.  
Esperanç va eurusted, allasl zo tremenet  
Evel ma ra un ure en nôs dre hor speret.

An exempl-mâ, tud yaouanq, a deu d'oc'h instrui  
Peguen dister ar bed-mâ, leun a ingrateri;  
Epad ma zoc'h pintidiq, gant an oll oc'h caret;  
Mes mar dro rod ar fortun... adieu ar mignonet.

Petra rân var an douar? collet va mam, va zad,  
Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat :  
O verval pe o veva er c'hoad gant al loñed,  
Rin guell eguet implori amâ faus mignonet.

Er c'hoajou an tevalla o tont d'en em guzat,  
Maguet viñ gant va glac'har, hac eus va daoulagad  
E tiredo an daelou da drec'hi va zec'hed,  
Betec ar moment eurus ma quittaïn ar bed.

En despet d'an injuстиç, a eprouvân hirio,  
Me bedo a greiz calon evit boneur va brô :  
O va Douel deurvezit renta, dre ho puissanç,  
Ar boneur, al liberte d'am brô guêr eus a Franç.